



## A-ENEP AR GOUENNELOURIEZH

ECHU GANT AR MENNOZHIOÙ  
TU DEHOÙ PELL-PELLAÑ

Ar CGT-EP, en he zouez gopridi rouedad Diwan, a rank lakaat war-wel an talvoudoù tost outi : ar stourm a-enep ar faskouriezh, an holl droukziforc'hioù hag an holl doareoù gouennelouriezh, evit an habaskter ha doujañs pep hini. Dalc'homp soñj eo touellus an tu dehoù pell-pellañ. Dav eo deomp bezañ war evezh rak tud runkonus o mennozhioù hag a glask mont e-barzh endro ar brezhoneg. Gouennelouriezh ha maouezgasoni n'o deus plas ebet e skolioù Diwan !



Fellout a ra deomp sachañ evezh an dud war Karta Diwan hec'h-unan. Rak e mod ebet ne c'haller ket gouzañv hag evit forzh peseurt abeg e vefe eztaolet ar gouennelouriezh e tiez-skol Diwan, AEPoù pe Skoazelloù. Diwan, kevredigezh dindan lezenn 1901, a stourm asambles gant an holl, tud pe pobloù gwallziforc'het ha/ pe minorelaet. Sinet e vez ar Garta gant pep kerent skoliad.ez ha pep implijad.ez Diwan.

Talvoudus eo Karta Diwan da vare ar skol kement hag er-maez eus ar skol evit an holl abadennoù dudius ha/pe sevenadurel aozet e anv Diwan.

Rankout a ra holl izili Diwan teurel evezh ma vo doujet dezhi neuze ha bezañ sur atav ne vefe ket danvez un emell, un abadenn, ur brezegenn, pe ur programmatur a-enep talvoudoù denel, digoradur war ar bed, degemer ar sevenadurioù all, ar c'hemmesk sokial.

Ganeoc'h emañ CGT-EP, gant an holl a stourm a-enep pep droukziforc'h.

Ar gouennelouriezh hag ar faskouriezh n'int ket ha ne vint asantet biken en hor skolioù laik, digoust ha digor d'an holl hep droukziforc'hiñ liv ar groc'hen, an azeuliñ, ar jener.



**CGT Enseignement Privé Bretagne**  
2 place Edouard Mazé 29200 BREST



academie.rennes@cgt-ep.org

